

D'AN ITRON VARIA

(EVIT AN DISTRO)

TON : Ni ho salud, Stereden, Vor...

Ni ho salud, o leun a g'hras,
Ganeoc'h 'ma Doue da viskoas :
Itron bepred Mam a Guerg'hez,
Benniget dreist an oll gragez !

Itron Varia,
Hano ar c'haera !

D'ho tiambrouk, o Rouanez,
E tiredomp gant levenez :
Rac e pep leac'h ma tremenit
N'eus pemet grasou da g'hounit.

Hano ar c'haera :
Itron Varia !

Abred ho peus karet Bro G'hall,
Boulogn, Fourvier (e), a kement all ;
Chartr, ar Puy, ho peus bizitet,
A mil leac'h a g'hrasou karget.

Itron Varia :
Hano ar c'haera !

Bro G'hall n'eo ket bet divezad
O figemer ar c'heloù mad...
Kals a lavar e c'hortoze.
« Ar Verg'hez a ve Mam ive ! »

Hano ar c'haera :
Itron Varia !

Mes kerkent a m'oc'h digouezet,
Evel guichall e Nazareth,
Ar Frans abez eo a dridas
Evel sant Yann, ar prophet bras !

Itron Varia :
Hano ar c'haera !

C'hui eo kannad ho Mab Jesus,
Karget d'he gass d'ar bobl eürus,
Hen deus krouet he Abostol,
Evit he brezec d'ar bed oll.

Hano ar c'haera :
Itron Varia !

Mil hano var hor muzellou,
Mil imaj var hon Ateriou
A kant mil Ilis konsakret
A verk deoc'h ho taou hon respet.

Itron Varia,
Hano ar c'haera !

Brema evel eur Rouanez
Ho peus lezet tron a pales,
Evit bizita ho poblon
A diskuill deo ho mennoziou :

Hano ar c'haera :
Itron Varia !

Mennos trist pa vent en anken,
Pa vent eürus mennos laouen !
D'ar pinvidik kouls a'd'ar paour,
Gras skuillet gant eur galon aour !

Itron Varia,
Hano ar c'haera !

En amzeriou gris ma vevomp,
E selloc'h a druez ouzomp,
C'hui a velas var ho parlen
Jesus maro, disliv a ien.

Hano ar c'haera,
Itron Varia !

Eur c'hleze 'dreuzas ho kalon,
O velet toullet, pegen don !
He dreit, he zaouarn, he gostez,
Gant enebourien didruez.

Itron Varia :
Hano ar c'haera !

Hirio hor stad ni ghag'harus
A g'houlenn eun dorn truezus
Da barea ar gouliou
A reas deomp hor follenteziou.

Hano ar c'haera :
Itron Varia !

Deuit eta, Folgoat, Rumengol,
Treguer, ar Porzou, Arvor oll
Ho deus izorn eus ho skoazel,
Morse g'hoas n'int bet ken izel !

Itron Varia :
Hano ar c'haera ?

Pa velimp ho pagik o tont,
N'eo ket eur spes eo a sonjomp,
Mes c'hui hor Mam, hor Rouanez,
Kerdeomp dreist pep tra : ar Verg'hez !

Hano ar c'haera :
Itron Varia !

Diskuezit deomp hent ar vertus
Hon deus dizesket, maheñrus !
Evit ma savo deus ar bez
Ar Feiz kos, ar Frans a nevez !

Itron Varia :
Hano ar c'haera !

Aotre da voula :
Quimper, 3 Here 1944.
P. JONCOUR, *Vikel Vras.*

